



Vous êtes ici : [Degemer](#) | [Servijoù](#) | [Sportoù / Dudiamantoù](#) | Park Krec'h Gwenn

Park Krec'h Gwenn

Mise à jour le : 28.03.2012 | 10h04



Un takad gouestlet d'an diskuizh, d'ar sportoù ha d'an dudiamantoù

E-kichen kreiz-kêr ha war c'hlan an Oded, en un endro hollgaer, emañ Park sportoù ha dudi Krec'h Gwenn. Un takad natur dudies ha mat evit ar sportoù dindan an amzer. Ul lec'h eo ivez evit diskuizhañ, en em gavout gant tud all, hag ul lec'h pourmen evit ar familhoù.

E park ar sportoù hag an dudiamantoù, digor a-hed ar bloaz, e c'hall an holl dud mont da bleustriñ war an holl sportoù kinniget hep na vefe ezhomm goulenn an aotre :

- Leurenn-ruilhañ (botoù-ruilh, plankenn-ruilh)
- Leurennoù c'hoari evit ar vugale
- Basket-ball – BMX
- Redadeg-reteriñ
- Trotadennoù
- Hentad Yec'hed
- Pesketaerezh
- Bouloù petank
- Pourmenadennoù

- Sportoù dour
- MTB...

Aveadurioù sport suraet (sportva-kêr peurgetket) a vez lakaet e-kerz an dud hag ar c'hluboù sport gant kêr Gemper. Dre ma'z eo bras niver an obererezhioù kinniget ennañ ez eo ur pol sport dibar :

- Maketennoù-nij
- Badminton
- Mell-droad
- Sportoù bageal bihan
- Kevredad broadel ar saveteiñ-mor (KBSM)
- Sportoù dour
- Tennis
- Gwaregañ...

Pol sport Krec'h Gwenn

129, boulouard Krec'h Gwenn
29000 Kemper

Ti-kêr Kemper

44, plasen Sant-Kaourintin
29000 Kemper
Tél. + 33 (0)2 98 98 89 89
Email : contact@quimper.bzh

